

KIMIAD

# PAOTRED MONTROULEZ

Var ton : Bretonet ar Vreiz-Izel



Habitant et Montroulez, dont a ran d'ho pedi  
D'am sicour ha d'am c'helen ma c'hilin composi  
Eur chanson' hac eur c'henviad da bevar den yaouane  
Goude intend ho raeon, herve va santimant.

Deus an ten an divean so bet er bla presant  
Ebars an ker Montroulez ar pevar den yaouane  
En deus tennet ho fevar en numero isel ;  
Partiet int d'an arme pa voar deut d'ho guervel

Goude m'ho devoa tennet ha digoet gante,  
E zikt bet em gleoet eno voar ar peve,  
Hac ho deveus prometet beza camarado  
Entre ma voint en arme bete soufr ar maro.

Har e ve dispartiet ar pevar mignon se  
Ha casset eis uguent leo en eil deus eguile,  
O devo c'hoas esperanç d'en em gaout assemblés  
En dro da guer Montroulez, gant ho feder mestres.

Ar savantan studiet n'en deo qet vit compren  
Peguemen è glac'haret ar peder femelen,  
Pa oué annoncet dezo gant ho c'namarado  
Ebars er fin an devez ar gant ho numero.

Entre ma choment er guer goude bezan tennet  
Pa errue pardonnou nac assamble ebet,  
Int bet fidet ho fevar dar peder feumelen,  
Hac ho deus int cunduet ebars en pep tachen.

An divea assamble o deus bet en ho bro  
A voa pardon Sant-Martin, sul ar C'hasimodo :  
Eno en em assamblont da eva boutaillat,  
Tri de arog partia, da ober ho c'hevrard.

En eur antrep er pardon o deveus remerqet  
Ar peder fouldeisen a sijen en ho speret;  
Gant cals a humilité ec'h ent d'ho saludi  
Evit conta ho raeon ha clevet ho ini.

Salud, peder feumelen a blich d'hon santimant ;  
Er memes tra, emeze pevar soudard yaouanc ;  
Deut omp da c'houlen enor deus ho compagnuez,  
Da bourmen dre ar pardon c'hoas eun abardevez.

En cals a assamble on deveus baleet ;  
Qemen a me c'houleñac'h, ne vec'h qet revuset ;  
Bras aoual'h en o chiac'h har eb ho disoblja  
Evit ar belder oc'h eus da chom gen en vro-ma.

Elec'h beza desolet, qemeromp plijadur,  
Doue a raio hon ponheur hac on oll aventure,  
Mar be lavared gantan a tistrojom d'ar guer,  
Hac e c'huizomp assambles a rest dens hon amser.

Cri a vije ar galon an hini na voelje  
O clevet ar prepojo a so bet entreze ;  
An eil dious eguile oc'h ober ho c'henviat  
Diouz ho muyan caret, qen douet d'ho c'huitaat.

Pevar bla a so breman, mignoneset fidel,  
Abaoue ma n'em darempredemp, ha da zul a da vouel  
Recevet hon deus an urs, red ez eo partia,  
Fchu eo hon plijadur eur pennat er vro-ma.

En an Doue, emeze, na jonget qet en ze,  
Soezet bras en em gueffet pa arruffet en arme,  
O velet hac a Gristen a so bet partiet  
Hac en deus gret eveldoch dious ho mignoneset.

Evel m'am omp d'a bosi e scriffomp eul liser  
Hac o po ar vadelez, mignoneset fidel,  
Pa erruo, d'en tenna ha da laca d'e lenn,  
Ha da digas dimp respont dious ma va hon goulen.

Goelet a reomp breman a c'hiui ho po respect  
Evidomp, evel m'ho poa en amser dremenet ;  
Ne vanqet qet, mignonet, pa red a bromes-ze ;  
Qement-se a hastenno an anter hon bue.

Quent evit ma partifomp, chetu aman merco,  
Eur mouchouar en ho cod, da sec'hant ho taero ;  
Reit dimp ar sort a gueret, e qefomp aneze  
Da zisqel pa errufet er gner gant ho conge.

FIN.

*Yann ar Gwenn*